

BUEZ

134

?

MARI-AMIC PICARD,

GANET E GUICLAN ,

BADEZET EN GUIMILLIAU ,

Hac enterret en Lis Cathedral Castel,

Tost da Auter Itr. V. a Vouir-Sicour ,

Er bloas 1652.

Var ton : *Genovefa.*

M'HO ped , Speret a sclérigen ,
Da zont da gundai va fluen ,
Evit ma ellin recita
Ur vuez demeus ar gaera .

Ar vuez-mâ a so troet
Eus al levr a voa composet
Gant Antrou La March e gallec ,
Evit ar bobl , e brezoneec .

Mari-Amic Picard so bet
Dre ar c'hraç a Jesus ganet

2

Deiz ar Burification ,
En Guiclan , escopti Leon.

E zad , e mam , tud vertuzus ,
Guir servicherien da Jesus ,
E savas gant calz a furnez
Epad ma voent en o buez.

Da Vam Doue e voa antier ,
Ha da Sant Yan Avieler ;
Adalec e bugaleach
Hi a reute dezo hommach.

Ne devoa c'hoas nemet sez vloas ,
D'ar c'henta sermon a glêvas ,
Voa var sujet ar chastete ,
Hac a blijas calz d'e ene.

Qerqent e eure da Zoue
Ar vœu eus a virginité ;
Hac e pèd iveau ar Verc'hes
D'e zouten ar rest e buez.

D'an oad eus a eiz vloas ractal ,
E servichas Christoph Abgral ,
Labourer honest , christen mad ,
A voa dezi evel un tad.

Dre ma voa yaouanqic meurbed ,
El leqjot da vessa'l loened ;
Hed an deiz en em occupe
Da bedi'r Verc'hes ha Doue .

Deus ar plaç m'oа gant e chatal ,
E trôe vit an ordinal
Varzu Lampaul ha Commanna ,
Guir-Sicour , Guimilliau peurvuia .

Evit gallout , vel plac'h fidel ,
 Caout pers en oferen santel ,
 Pa n'elle qet realannant ;
 Beza hervez e santimant.

Ar sqüier vad a roe bemde ,
 Voa admiret bars er c'hontre ;
 Mes peimp bloas goude voe galvet
 Da sicour e zad voa blesset.

Amic , leun a gompassion ,
 Ha carguet a zevotion ,
 A yas da Sant-Men prest timat ,
 Da c'houlen ar yec'hed d'e zad.

Gar e zad voa cazi breinet
 Er moment ma voa partiet ;
 Mes qerqent vel ma tistroas ,
 Ar gouli en em bareas.

O tistrey deweus a Sant-Men ,
 Hac e Montroulez oc'h antren ,
 E yas prest da Sant-Dominiq
 Da bedi e Mestres uniq !

Ar manac'h Pêr Qintin neuze ,
 Oc'h anaout desseniou Doue ,
 Ouz Amic Picard , a dostas ,
 Hac outi vellen a gomzas :

« Va merc'hic , ha c'houi gar Doue ?
 — Ia , certen , dre c'hraç an eë . »
 — Deut da gôves en brezonec ,
 — Pa na ouzoc'h qet ar gallec.
 — « Penaus ec'h ouzoc'h-hu , va zad ,
 « Em boa-me c'hoant da govessat ? »

— Va merc'h^l, dre ar c'hraç a Zouie,
 « E voan instruet eus a se. »

E c'hôvession achuet,
 An tad dezi en deus roet
 Gant laouenidiguez ur groas,
 Ha neuze dei e lavaras :

« Va merc'hic, mirit ar groas-se,
 « Ha douguit-hi hed ho pue :
 « Un amzer vo e pebini
 « Ec'h ello dont d'ho soulagi. »

Distrei eure d'ar guêr neuze,
 En eur drugarecât Doue,
 Da veza bet covessaët,
 Hac e c'halon baour soulaget.

Ur pennad goude qement-mâ,
 Ar mañac'h voa o veacha,
 Hac én en em gaout hep retard
 Ebars e ty Amic Picard.

« Va zad, einc Amic dezàn,
 « Goal chagrinet en em gavân,
 « Dre na zeus qet un tam bara ;
 « Nemet souben n'eus en ty-mâ.

— « Gant joa me receo ho repas,
 « Em e an tad, goal goutant bras :
 « Se a dosta guell d'am c'halon,
 « Rac ne mieus nep pretantion. »
 Tad Amic Picard, ciàñ neuze,
 A c'halv d'e gaout e vugale :
 « Va bugale, sonjit ato
 « En Doue betec ar maro.

« M'ho pež esperanç e Doue ,
 « Ho pezo graç demeus an eê .
 « Me a ro deoc'h a greis calon
 « Bremâ va benediction .
 « Va merc'h Amiç , c'houi ho pezo
 « Calz a drubuillou da receo ;
 « Mes na gollit qet esperanç :
 « Doue so bras e brovidanç .
 « Ur c'hoant meurbed a santân-me
 « Da gaout ur ministr a Zoue :
 « Amiç , galvit buan expres
 « Da zout d'am noui , Dom Jacques . »

Amiç o veza distroet ,
 Goude beza avertisset ,
 Diouc'h-tu an Autrou Pouliken
 A erru da dal ar c'hristen .

« Va zad , sicourit ac'hanòn
 « Da vervel en christen guirion :
 « Adieu , bed , emezàn neuze....
 « In manus tuas , Domine . »

Amiç , p'oe e zad decedet ,
 Da sicour e mam so chommet
 Betec an oad a drêgont vloas ,
 Hep ma en em glêmas biscoas .

Diffarant eus calz bugale ,
 Pere sel vel ur garg deze
 Soigni o zud en o c'hosni
 Rac aoun dont da en em geni .

Ur vech hepken e tisentas
 Ouz e mama , dei pa layaras :

« Amic qèz ! tach da zeinezí

« Hac e po nebeutoc'h anui.

« Biqen , va mām , na zemiezán ;

« Ganeoc'h evrus en em gavàn... »

E zud o clévet anezi ,

A gominanças d'e goal-dreti.

Recco ra reprochou piqant

Da garout bucz feneant ;

Ausia , ne devoa nep repos ,

Na nep doucder iui da c'hortos.

O va Doue mad , emezi ,

Hac e creder va accusi

Da gaout aoun demeus ar poanniou ,

Hà da grena diouc'h trubuillou !

Guerc'hes santel , ô va Mair guér ,

C'houi , Sant Yan an Avieler ,

Ha dreist oll , ô Salver Jésus !

Teulit varnón ur zel truezus.

Ar pez e devoa e c'hrén'êt

E voa bet e zad o clévet

O lavarat d'e mam un de

Laqat e esperanç en Doue .

James Amic bars en dancou ,

Na qenbeut en nosveziou

Na vije guelet o qerzet ,

Nac o vont etouez ar bautret .

O tont gant ar procession

A Lambader , gant feiz guirion ,

Gant un Autrou voe arrêtet ,

Hac offrou infam desi grët .

Amiç a recours da Zoue
 Ha d'ar Verc'hes sântel i've ,
 Da Sant Yan en Avieler
 D'e delivra eus a valer.

A doliou bas e voe scöet ,
 Ha gant ur vistolen tennet ;
 Mes ar monstr a se a voe voas ,
 Rac ebars e zorn e crevas.

An den fall a voe prisonniet
 Hac e Montroulez condaonet ;
 Mes en Roason e voe barnet
 D'ar galeou evit beprct.

Amiç so bet var e guele
 Er spaç eus a zaou vis goude ,
 Gant suit eus ar goal drêtamant
 En doa grêt dei an den mechant.

En c'hoezec cant nao ha trêgont ,
 E doa sonjou leun eus a spont ;
 Ar purgator hac an ifern
 A vele ha corfou en bern.

Escop Qerne , Rene Louet ,
 Eu deveus bet certifiet ,
 Penaus epâd hed trivac'h vloas
 Amiç a voe vertuzus bras.

Gant calz ~~temeus~~ a jesuitet
 E zoa bet Amiç bisitet ;
 Ha memes gant an tad Dinet ,
 Cövessour da Louis trizec.

Hac oll ec'h assurjont neuze
 E zoa leun a speret Doue ,

Hac e zoa carguet a vertus ,
Hac ive guir verc'h da Jesus.

Meurbed e voe persecutet ,
Gant tud mechant , na glasqent qet
Bemdez da implija peb art
Vit coll Mari-Amic Picard.

Daoust d'an oll bersecution ,
Bepret ferm er religion ,
Amic na oppose netra
Nemet vertuziou ar gaera.

Admiret en e discoursiou ,
Coulz vel en e oll demarchou ,
Ar simldet demeus e c'halon
A zisqueze e voa guirion.

Certen e zoat bet assuret
E devoa bepret cunduet
Ur vuez ar vertuzussa
A ouffet cayet er bed-mâ.

Souffret calz e deveus certen ,
Deus a bers e adversourien ;
Ha james na barisse trist ,
Dre ma souffre vit Jesus-Christ.

Paperou so bet imprimet
Dre urz Esqeb ha Viqelet ,
Da attesti ar virione
Eus a guement a zigueze.

An Autrou Yoen a Boulpri
Autrou Drebodennic , piui
Ariogan , den a fècon ,
A Guiminidilly e Leon.

Oll e zint bet test a viscoas
 Penaus er spaç a drivac'h vloas
 Amic Picard na ellas qet
 Anduri nep bevanç ebet.

Neb bevanç na elle qemer,
 Nemet Sacramant an Auter,
 A receive casi bep sizun,
 Illa peurvuia e voa d'al lun.

Arruout a ra e Castel,
 E pelec'h voa un demezel,
 Janned Mancel e voa hanvet
 A yê alies d'e guelet.

E zad en doa c'hoant d'e demezi
 D'un digentil a Normandi;
 Consulti ras Amic var se,
 Hac e heuillas urzou Doue.

Lavarat eure d'an itrón :
 « Me a lavar deoc'h gant gnirion,
 « Penaus e cléfot comz ouzin,
 « Hac em bezo poan ha chagrin. »
 « Mes var se m'ho ped da devel,
 « Rac vit Jesus me c'houll mervel;
 « Illa rac-se, neus fors petra ve,
 « Eezet grêt bolonte Doue.

Amic a voe placet souden
 E ty'n demezel Lenoudren;
 El lec'h m'oa pansionnerezet,
 Hac a voe ganti estonet.

An Autrou Guillou a laqa
 Ur plac'h hanyet Gabriela,

**Ha souden Janned Roqinard
Evit soigni Amiç Picard.**

Janned voa ur fals devodez
Ha na glasqe qen alies ,
Ha dre e jestou ha dre art ,
Nemet noas da Amiç Picard.

Gabriela a voa ive
Ur pennic scàn ha didalve ,
A vije bepret er festou ,
Hac a rede d'an nosveziou.

Amiç o c'houzout qementse ,
A lavaras dezi neuze :
Mar cuntinuit evelse c'hoas ,
M'el lavaro d'ar Vigel-vras.

Gabriela a voe neuze
Offanset eus ar gourdrous-se ,
Hac a respontas da Amiç
Gant ur galon leun a valiç :

« Mar teu did comz a enep din ,
« Me rayo did assur chagrin ;
« Rac me a douo da james
« N'out nemet un hypocrites. »

Gabriela a yas e cus
Tre da gaout ur religius ;
Hac a ras rapportjou euzus
Deus a Amiç , buguel Jesus.

Persecutet voe adare
Guir servicheres hon Doue ;
Chasseet voe ermès an ty
Ar plac'h qen devot da Vari !

Autrou Poulpri neuze ractal,
 Ariogân ar gathedral,
 O c'bout stat trist a verc'h ar groas,
 A voe meurbed glac'haret bras.

Rober Cupif neuze hanvet
 Escop Leon, ha consacret,
 A scrifas d'an Autrou Louet
 D'ober qen' vije arruet.

Arruet er Guær a Gastel,
 Ec'h anav Amic hep dale pell,
 Hac e voe contant bras neuze
 Eus a servicheres Doue.

En c'hoezec daou hac anter cant
 E voe ar fin deus e zourmant.
 Doue en d'oa dei revelet
 E varvje da zeiz Nedelec.

An Autrou Escop e nouas;
 Ha gant soign vras e c'honsolas :
 « Va merc'h, esperit en Doue ;
 « Digor e zeo déc'h dôr an eê. »

Deiz Nedelec, vel ma vouie,
 O rancout renta e ene,
 En em laqas var e daoulin,
 Vit implori ar Mestr divin.

Neuze n'em brepar da vervel;
 An oll Zent a zcu da c'hervel,
 Hac e varv, en eur brononci
 Hanoyou sacr Jesus ha Mari.

E bisach voe disoloet,
 Ha d'an oll eno exposet :

**Ha deiz ar gouel a Sant Stephan
Voe interret incontinan.**

**Ebars en Ilis cathedral
E ma e bez casi ractal
D'auter Gouir-Sicour beniguet :
Bisitet eo gant peb respet.**

**Guiclannis ha Guimilliauis,
C'houi dle caout sonch eus a Amiç,
Dre ma zoa demeus ho contre
Ar servicheress-se da Zoue.**

**Ha c'houi , etrezoc'h , Castellis ,
A bossed bars en hoc'h Ilis
Ar verc'h eurus-se da Jesus :
Imitit-hi en e vertus.**

**Pobl antier demeus a Leon ,
Tud ferm en ho religion ,
Bezit , m'ho ped , en ho speret
Sonch en Amiç Picard beprest.**

FIN.

